

7
Merc'het, deut d'o fardoni.



CH AN S O N

AR PLAC'HIC PAOUR HA FUR.

Var ton Fantic Coant.

DEIZ mad dêc'h, Fantic Coant...

Mes pebes chenchamañt!

Diveza m'ho quelis

E voa fresq hoc'h invis;

Mes abaoue, me gred,

Noc'h eus-hi get chenchet.

Joa vras ameus ouzoc'h,

C'hoas em bije muioc'h,

Ma vije ho qenet

Eun nebeut decoret

Eus a netadurez....

Pardonit, va mestrez.

Na ellàn get credi

E ve dre zieguñ,

Qen nebeut supposi

E ve dre loustoni

O cuelàn, plac'h yaouañqoa am

8

En ho lingeri fanq.
 Anzavit din hep mez
 Doare ho tieguez.
 Paourente zo calet,
 Mes n'en deo qet pec'het :
 Lavarit din hep aon
 Ha c'houi a vanq a zaon.

Autrou, e ty va mam
 Na gafet qet un tam,
 Nac arc'hant da brena,
 An dra-se zo goassa ;
 Evelse n'en don qet
 Da veza tamallet.

Ne ve cavet em zy
 Nemet teir scudel pri,
 Teir loa goad, ur bodez,
 Ur podic da glasq lèz,
 Diou scaon, un tabore,
 Ur banq hac ur guele.

Cavet e ve ouspen
 Un tamie chaoudouren ;
 Ur gos cramaileren,
 Trebez, pillic, pladen,
 Evit oza crampoez,
 Mes nonpas alies.

9

C'hoas ur c'hribinou mad,
 Pa ve lin da gribat,
 Daou gar evit neza,
 Travouill da zibuna,
 Tamouez da oza'r bleud,
 Pa vez guerzet an neud.

N'on neus qet pemp guennec.
 Da gaout un tam blonec,
 Nac un dornad olen
 Da zalla ar zouben,
 Hac evit ober tan.
 Hon eus ur garguic lann.

Cetu aze, autrou,
 Invantor va guiriou.
 N'en deus qet er c'hontre
 Ur plac'h qer paour ha me;
 Mar clasqit ar madou,
 Chenchit tu d'ho pajou.

Var guementse, f'antec,
 N'en doc'h qet pinvidic?
 Mes ho comzou guirion
 A ravis va c'halon :
 Seulvi ma ho clévan,
 Seulvuioe'h ho caràn.

Me zo ur marc'hadour

10

Dre zouar ha dre zour ;
 Me meus aour hac arc'hant ,
 Ha demeuranç charmant ,
 Gant sourci vras meublet ,
 D'ho receo pa guerfet.

Tri pe lêvar bloas so
 E valeàn dre'r vro
 Evit clasq ur pried ,
 Ha n'em eus qet cavet
 Ini d'am zantimant ,
 Nemedoc'h , plac'h prudent.

Lavarit din eta
 Ha me a dle conta
 Da gaout ar blijadur ,
 Dre voneur dreist natur ,
 D'ho quelet oc'h orni
 Dre ho qenet va zy ?

Mar bez contant va mam ,
 Me na zifferin tam.
 Dre vemes carante
 Deomp hon daou he bete ;
 Va c'halon zo mantret
 Mar bec'h discouviet.

Beiz mad , greg henorus ,
 Mam vad , fur hac eurus ;

Mam d'eur verc'h enorabl,
 Caer, modest, agreabl,
 Am ho evit pried,
 Ma n'am refusit qet.

Birviqen ne gredàn,
 Autrou, vec'h deut amàn
 Evit ober goulen
 Demeus eur vergeren
 A bep tra dibourve,
 Sepet a burete.

Sellit e pes castel
 E chom an demezel;
 Guelit e peb costez
 Ar brassa paourentez
 Evit ho tistrei
 Deus an nep fantazi.

Mam, eus ho tieguez
 Em eus anaoudeguez;
 Var guementse tevomp,
 Hon tri en em glévomp
 Da veva en hon èz
 Dre va finvidiguez.

Autrou, ne dleàn qet
 Refusi ho reqet,
 Dre ho tisinteres

12

Er choas eus ur vestrez ,
 E zoun sur e rentfet
 Eurus va merc'h caret.

Dre o friedelez
 Eurus voent assambles ;
 Douçter ha yaouanqis ,
 Modesti ha coantis
 A zo-guell avichou
 Eguet an oll vadou.

CONCLUSION.

Dre'r zon-mâ e veler ,
 Var ar mèz hac en qêr ,
 E zeo ar barfetet
 A blich mui d'ar voaset.
 Rac-se , merc'het ar vro ,
 Bezit modest ato ,
 Hac e cavot pried ,
 Evel ma teziret. -

F I N.

E Montroulez , e ti LÉDAN.